

CANTIQ MISSION PLOURAC'H.

Roët gant an Tadou Delaizir ha LE FORESTIER en pad or pemzec de
quantan à vis Querzu, 1860.

Var don : Jesus peguen bras ve.

Canomp a voëz huel
Ar mission santel
Neus betlec'h en Plourac'h } bis.
Gant solanite vras. }

Discan.

Mission biniguet,
C'houi a nevo bepret,
An oll meulodiou } bis.
Dimeus hon c'halonou. }

Daou dad missionner
Deus ar guer a Guemper,
Galvet gant ar Person } bis.
Neus groet ar mission }

An Tadou so aru.
An eil a vis querzu
Deus ar bla oa o ren } bis.
Mil eiscant triuguen. }

En presanç tud ar vrô
So deut d'ar gousperô,
Ar retret à zigor } bis.
Drer *Veni Creator.* }

En pad ar pemzec de
Oll dud eus ar c'hontre
So deut d'ar mission } bis.
Gant guir devotion. }

Hag a deus chelaouet
Gant ar brassan respet
An instructionou } bis.
A neus groët an Tadou. }

Peguen caër voa goëlet
An oll assistantet,
Tud just a pec'herien } bis.
Oustreit arveleien. }

Stouet oll d'an daoulin
O squein var o feultrin,
Hag o c'houlén pardon } bis.
Deus a greis o c'halon. }

Coves a rent hep mar
Gant ar brassan glac'har ;
Cals a scuille daërou } bis.
Gant queun d'o fec'hejou. }

Mes pebes chanchamant!
Pebes contantamant !
Goud'er govession } bis.
Ar joa oa er galon. }

Neus e vije goëlet
An oll gant joausded
O sevel o moëjou } bis.
Da ganan canticou. }

Ha chilaou a neve
Prezec camjou Doue,
Gant disir d'o miret } bis.
Bepret en osperet. }

De ar gomunion
Pebes devotion !
An oll oa anflamet } bis.
A garante barfet. }

Ra vezo, ma Doue,
Meul et ho majeste !
Dimeus hoc'h oll graçou } bis.
Hag ho tonezonou. }

Ha c'houi, o ma Jésus !
Reit dimp graçou nerzus,
Evit trec'hin ar bed, } bis.
Ar c'hiq, an drouc speret. }

Evit ober ato
Brezel d'an oll viço
D'an occasionou
A zoug d'ar pec'hejou. } *bis.*

Mari. Guerc'hes tener,
M'am douç en honc'henver,
Ni vezo d'a viquen
Ho couir servijerien. } *bis.*

Scapuler biniguet
Ni ho tougo bepret!
Ni vezo dreist peptra'
Devot d'ar Rosera! } *bis.*

Interramant ar relegou.

Bars en creis ar retret
A so bet interret
Relegou hon tadou,
Hon breuder, hon mamou. } *bis.*

Caëran ceremoni!
Pebes quantel dimp-ni!
Rac ni varvo ive
A dra sur hep dale. } *bis.*

Ni lavarou soudan,
Gant glac'h ar hag anquen,
Adieu da dud ar bed,
Querent ha mignonet! } *bis.*

Adieu d'an oll joayou,
D'ar plijadurezou,
D'ar madou, d'ar guenet,
D'an oll draou deus ar bed. } *bis.*

Ar groas mission.

Ha c'houi croas biniguet,
ehini so savet
it digas d'hon c'halon
onj deus hor mission. } *bis.*

Quenliez m'ho coëlin,
Quenliez a zonjin
Or mission santel
Neus goëlet o sevel. } *bis.*

Dreist pep tra me sonjo
En instructiono
Neus touchet ma c'halon
En pad ar mission. } *bis.*

Sonjal a rin bepret
A meus bet prometet
Bevan da virviquen
Evel eur guir gristen. } *bis.*

Quimiad an Tadou.

Pa laras on Tadou
O divezan comjou,
Vit hon recomandi
Da Jesus ha Mari. } *bis.*

An oll oa glac'haret
Hag a c'halon mantret,
Cals a scuille daërou
Gant ar c'heun d'an Tadou. } *bis.*

Tadou madelezus,
Ha quen carantezus!
Quent evit hon quitat
Reit dimp hoas eur mennat. } *bis.*

O pet sonj ac'hanomp,
Ha ped et evidomp!
Rac ni a dra certain
N'oc'h ancoafomp biquen. } *bis.*

Canomp eta bep nos,
Aroc mont da repos,
Conomp a vir galon,
Cantiq hor mission.